



CANTIC SPIRITUEL

E gloar DOUE hac an ITRON VARIA KERDEVOT, pehini e deus ur Chapel caër e Parres Ergue-Vras e quichen Quimper - Caurintin, e pehini e ra bemdez Miraclou bras. Voar Ton : Santes Mari, &c.

Vos omnes sitientes, venite ad aquas. C'hui oll pere hoc'heus feyer, deut da efa d'ar Feunteun a vuez.

TAd, Map ha Speret-Santel, tri Ferson en un Doue,
M'ho suppli, a vir galon hac a greis va ene,
Da dirigea va memor ha ma ententamant,
Ma composin ur C'hantic d'ar Verc'hes puissant.

Biscoas, Christenien, sioas! n'hor boa brassoc'h ezom
Da supplia hor Salver hac ar Verc'hes e Vam,
Da rei ar c'hraç d'hon Roue da veza victorius
Var e oll ennemiet, adversourien Jesus.

Tristidiguez a velàn, allas! pell so er bed;
Quernez hon eus bet ivez commançet da velet,
Allista a reomp bemdes en enterramanchou
Demeus a dud hor c'hanton, hac en ho servichou.

N'en deus nemet ar vocen n'hon deus quet c'hoas guelet
En hon touez er vro-mâ, Doue ra vezo meulet:
Pedomp an Dreindet Santel hac ar Verc'hes Vari,
Ma vezimp guitibunan preservet diouti.

Ar voyen d'en em assuri eus ar guir joausdet,
Ha da bossedi da jamæs ur peoc'h hir ha parfet,
Eo supplia ar Verc'hes da bidi evidomp,
Pa na veritomp siouaz! e selle doue ouzomp.

Meur a blaç santel dezi er bed a so savet,
Eleac'h ma zeo enoret, caret hac invoquet,
Eleac'h ma accord Doue, dre e intercession;
Graçou bras d'ar bec'herien p'e fedont a galon.

Hep choqui e nep façon Ilis santel eber,
Me souten goude cals a dud gant lealdet,
Emedi en hor c'hanton an Ilis devota
E deus ar Verc'hes Vari hac ar principala.

2 *folle*

Coms a ràn deoc'h, Christenien, eus an Templ biniguet,
Toft da Guemper-Caurintin, KERDEVOT guir hanvet,
So batisset d'ar Verc'hes dre vir devotion,
An Ilis ancienna e deveus er c'hanton.

C'hui Ergueiz-Gaberic, a bossed ar c'haera
Demeus an oll tenforiou a so var ar bed-mâ,
Ar sourcen eus a c'hraçou an Drindet adorabl,
Elec'h ma arru bemde Miraclou surprénabl.

Un histor a rapporter dign da veza discleriet,
Penaus ar Verc'hes Vari, evit ma vise goueet
Er c'hantoniou divar dro, Santela plaç e voa,
Eleac'h ma cleo ar pec'hour gant carantez ha joa.

A lavaras exprestamant d'ur muniser yaouanc
Ober dezi un ouvraich a vise excellent,
Un ouvraich ar parfeta a ouisie da ober,
Hac e vise paet en Eon gant Jesus e Map-quer.

Pa vise achu gantàn, en ambarcse timat
En ur chaloup var ar mor: chelaouet ar Miracl,
Ha Doue er c'honduje d'an devota Ilis
A oa d'ar Verc'hes Vari batisset e Breiz.

Pa voa voar ar mor ha guelet gant an dut,
E teue ar Veleyen, Fabligen a bartout,
Mæs ne dostaas ouz nicun quen na voa arruet
Person an Ergue-vras ha Fabric Kerdevot.

An ouvraich santel neuse d'an douar a abordas,
Ar Fabric a Kerdevot hep dale er c'hemeras;
E Kerdevot e voa rentet gant ur pomp magnific,
Laqueet eo eoc'h an Auter da velet d'ar public.

Eürus bras o cavàn, habitanter Ergue,
Da veza, dre breferanç d'an oll dud ar c'hontre,
Enoret demeus un Ilis quer caër ha quer santel,
Mammen an oll miraclou ha graçou eternal.

Pareffionis Elliant a ouffe lavaret
Peguer santel ar plaç-màn d'ar Verc'hes binniguet;
Na dleont quet ancouât ar rest eus o buhe
An obligation o deus da Vari, Mam Doue,

Attaquet oant gueichal gant ur c'blenvet cruel,
Ur pestilanç dangerus, commanç a rent vervel:

Quer stanc e varvent bemde quen na vanque loënet
Ha quiri d'o c'hass d'ar vorc'h d'an douar binniguet,
Pa velzont an danger bras e oant oll da vervel,
O devoue recours ouzoc'h Guerc'hes Sacr ha Santel ;
En em voella a resont gant cals devotion,
Da Kerdevot d'ar pardon gant o Frocession.

Er moment ma partijont eus parres Elliant,
Da vonet da Kerdevot, o doa soulageamant,
Rentet pare ha ditpos, ha yac'h eus o c'hlenvet:
Guerc'hes Glorius Vari, ra viot binniguet.

Ober a resont neuse ur vœu perpetuel,
Ma teusient ur veich bep bloas da Ergue d'ho Chapel ;
D'ho trugarecât, Guerc'hes, demeus ho tonafon,
Nobl ha partabl, Beleyen gant o Frocession.

Meur a den bet massacret, ha voar ar mor beuset,
Dre ho calloud, ô Guerc'hes ! so bet reffuscitet ;
Cals a dud, dre accidant privet eus ar guelet,
O deveus e Kerdevot ar sclerigen cavet.

D'an dud troublet a squiant, ha memes foll rentet,
Kerdevot so ordinal ur remed assuret ;
Hac an traou a ve laëret, pa vent gouestlet dezi,
Na ell quiet e nep façon all laër o dransporti.

Davantaich an nep a goues siouas en accidant,
Pe dalc'het var ar guele gant clènvèt languissant,
So guelleet e Kerdevot, pa zeuont a vir galon
Da c'houlen digant Mari e intercession.

Er Pareffiou divoar dro un nombr bras a Gueriou ;
En danger da veza laquet e poultr hac e ludu,
Siouas ! dre un tan terrubl, a so bet ficouret
Er moment ma zint d'an Templ a Kerdevot gouestlet.

Beza eus tud var an douar pere dre un domaich,
Pe dre ur fortun bennâc a goll prest o c'houraich,
Pe ma zint bet pell amfer gant clènvèt languisset,
Pe trist, melconiet, casî disesperet.

E Kerdevot e cassint ar consolation,
Elec'h o zistridigues, m'ar deuont a vir galon,
Prosperite er bed-màn, er bed-all joausdet,
Rentet joaus ha contant, ha parfet a speret.

Ouspenn ar graguez brasfes, pa vent estranch e poan;
 O clasq digaç voar ar bcd o bogale bihan,
 A so a Kerdevot diboanniet hep dale
 Dre voyen ar Verc'hes Sacr: meulet ra vezo Doue.

Mæs bete vremâ n'em eus quasimant lard netra;
 Chetu ar c'haëra miracl hac ar principala,
 Ar pec'herien obstinet a chench oll o goall stat,
 Pa zeuer d'o recommandi d'ar Verc'hes honorabl.

Me a brouv quememâ dre ar personachou
 So bet ganti sicouret en o necessiteou,
 Me zisquei doc'h sclæramant quement am eus laret:
 Clevit attantivamant, m'ho disclerio doc'h net.

Ur soudard eus a Guemper, hanvet antrou Deschamps,
 O visita Kerdevor er c'hoarais divezân,
 En deus laret d'ar Fabric ez e bet sicouret
 Gant Mari en he gampagn er goan-mâ tremenet.

Ar Soudardet a voa bet gant an Autrou Duguay,
 Na allent quet rancontri an hent da zont d'ar guer,
 En danger da veza collet var ar mor perillus,
 En em offret o deus bet d'ar Verc'hes glorius.

Deut int d'e zrugarecat, pa int deut da Guemper,
 Roet o deus dezi e presant ur Chapelet caër,
 Ha roet un offranç-all c'hoas ha guers Offerennou,
 Soutenet-y c'hoas, Guerc'hes, en o oll combatou.

E mis c'huevrer diveza, chelaouet, me ho ped,
 Un den a dreo Langolen eus a Barres Briec,
 O vont gant e varc'h un deiz d'ar Foar da Gastellin,
 Oa var ar poent dangerus en ur star da veusi.

Dre bermission Doue e arruas un den,
 O velas o vont oc'h traon gant an dour marc'h ha den,
 Var e zaoulin e stouas, da Vari o gouestlas,
 En e zi a Kerdevot ebars en Ergue-vas.

Prest e voant da veza maro pa voant gouestlet dezi,
 En instant ma int gouestlet, sicouret int ganti;
 Un dra, eme an den-mâ, dre bermission Doue,
 Evel ur voguer creo o arretas en Eê.

Un nombr bras eus a dud a Guemper-Caurintin,
 A Barres Sant-Evarzec hac a Ergue-Vihan,

1049

A Ergue-Vras, a Vriec, a Barres Kerfeuntun ;
Demeus a Barres Elliant hac a Barres Cuzon.

Deus o c'hlenvejou marvel a so bet delivret,
En o afflictionou a so bet consolet,
Deus a pleuresi, terc'hen, pourpr ha pep seurt clenvet ;
E Kerdevot ez int bet antieramant yec'heet.

Ur Bælec originer a Ergue-Gaberic
En deus bet e Kerdevot ur yec'het manific ;
E spaç eus a bemp sizun e bet var ar guele,
Dilavar, abandonet gant quement en guele.

Eur vourc'hises a Guemper, siouas ! dre accident
Rentet mudes pemzec de, privet eus ar pariant,
So bet gouestlet en Ergue d'ho Chapel biniguet,
Dre ho craç, Guerc'hes Santel, e deus bet ar prezec.

Eus a Ergue-Gaberic eur vræc borgnes rentet
Gant un taich vat e lagat, savet dre ur c'hlenvet,
E Kerdevot er guelc'has gant an dour souveren
Eus a feunteun ar Verc'hes, m'e devoue sclerigen.

Bremàn eus bet unnec vloas da Vouel ar Chandelour,
Gant curun hac ave-foll e voa couezet an Tour,
Ma voa surpreret un den, allas ! dindan ar vein :
Daouzec carrat assuret a voa couet var e guein.

Coufgoude e voa clevet o crial, o lamant,
Oc'h en em recommandi deoc'h, Guerc'hes puissant,
Ma voe dre ho cuir sicour ac'hane dili ret,
E oll isily briset, brusunet, massacret.

Ar biana eus ar vein voa capabl d'e laza,
Pa ne m'hoc'heus bet miret, ô Itron Varia !
Ma cofessas, quent mervel, gant cueuz e bec'hejou ;
Bremàn en deus an honor d'ho guelet er joayou.

Un den a Barres Elliant prest da goll e broces
Gant un amezec dezàn dre vir traitoures,
A deuas da Kerdevot da visita Mari :
Gounect en deus e broces dre voyen anezi.

Eus a Ergue-Gaberic ur vræc fur ha prudent,
E deus bet dre ur c'hlenvet collet e jugeamant,
Mas quen terribl quen na voa ret d'e ameseyen
He divoall hac he staga en e zy gant querden.

Bet an amser a garo, e zer accustumet
 Da graç he Mabic JESUS d'ar Verc'hes binniguet.
 Oferen-bret ha Gousperou a ve ebars en de-ze,
 Benediction Doue pehini a ve goude,
 Orgraou ar Verc'hes a son epad an oll amser
 Da enori he Map JESUS a so var an Auter.

ADDITION, var ar memes ton.

<p> Kerdevot a bell amser E Rom a so brudet, Ar Pab Santel d'ar pec'her En deus-èn discleriet : Roet en deus Indulgeançou D'an nep a goesso Gant glac'har e bec'hejou, Hac a gommunio. Merquet eo en e lizer Da Voueliou Maria. E Kerdevot e renquer Neuse communia, Ar G'hristen a guinigo Da Jesus e galon, Hac a vez voar e varo Gant guir devotion, Ret eo e ty ar Verc'hes Goul azigat Doue E c'hraçou, e vadelez, Chanç ha gloar d'hor Roue, D'hor Mam santel an Ilis, D'ar Brincet Christenien D'enem c'houzaon hep maliç Er peoc'h ha dianquen. </p>	<p> Songeal a renquer ive Eus ar Schismatiquet, Heretiquet, Barbaret, A so dall a speret, Pedi dre e c'hraç Doue, Da rei dezo sclerigen Da gredi en e Vue Hac en e Ilis Christen. Mirit an Indulgeançou A so dre graç Doue Er Purgator er poaniou Ne ve quet an Ene, Dont a raï d'ar Baradoes Ha d'an Eternite Gant ar Sent hac ar Verc'hes Hano a gloar Doue. Va breudeur, va c'hoarezet Deut eta gant fizianç Da Kerdevot binniguet, Scarguet ho coustianç, Coëffet ho pec'hejou, Recevet Corf JESUS, Ha goalc'het ho calonou En e voat precius. </p>
---	--

ADDITION, var ton Santes Genouefa.

<p> E Kerdevot ez eus Indul- jançou quer bras, Evel a gaver e nep plaç, </p>	<p> Seiz vloa a so a vir pardon O tont eno gant devotion. Hac a so goude quemense </p>
--	--

N'en deus den var an douar quér calet a galon ;
 E guelfe er stap trist-mâ hep caout compassion,
 O chanchat var bleo e fenn, hac o straqual e zent ;
 Ma Doue, èn so terrubl coll ar guir sclerigen !

E priet hac e c'herent ouz e c'honfideri,
 Na zebre na ne eve, torret e isli,
 Defiguret e bifaich hac e fellou troet,
 E gouestlas e Kerdevot d'ar Verc'hes binniguet.

Incontinent e deus bet squiant a neve flam,
 Jesus ra vo binniguet, ar Verc'hes Sacr e Vam,
 Hac e deus testamantet eus vros eus e dillat
 Da enori ar Verc'hes, ha d'e zrugarecât.

Ar groasguez a ve poaniet en o guilioudou,
 So sicoaret gant Mari bemnos, bemde-choulou,
 Hac o bugale vihan, pa vent sempl, languissant,
 P'o recommander dezi, o deus ar vadisiant.

Ho feunteun, Guerc'hes Vari, a so bras e effet,
 Guellaat a ra d'an derc'hen, catar, pep seurt clènvèt,
 Davantaich, ous e scarza, e deus pep magueréz
 Da vaga o c'hrouadur abundanç eus a læz,

Dont a ra da Kerdevot bep guener eus ar c'horais
 Un nombr bras a dut devot, bep Sul, bep Gouel, bemdeis ;
 Pedet nos ha de ar Verc'hes ma ho quello er gloar,
 Ha quement so devot dezi var an douar.

N'en deus quet quen alies a deis ebars er bloa,
 Evel a viracl a ra ar Verc'hes Varia ;
 Mar fell deoc'h en approui, en em recommandet
 E Kerdevot da Vari, pa viot affliget.

Rac-se eta, Christenien, quemeromp esperanç,
 En Iis a Kerdevot lequeomp hor c'honfianç,
 Ha pa omp bet d'ar Verc'hes caus da veza Mam Doue,
 Pedomp-hi ma vimp salvet pad an eternite.

Considerit, Christenien, pa arruet en he zi,
 Emedi e Map JESUS etre he divrec'h ganti,
 Evel pa e deffe desir d'e rei da vriata
 D'ar belerinet devot a zeu d'e bisita.

D'ar yaou hanvet gouel Doue, ententet Bretonet.
 E casser ar Sacramant da Kerdevot benniguet,

Un nombr eus a zaouguent de,	Caëra Guerc'hes ouffa: h guelet,
Gant ar Pad Santel int ac- cordet	Baleet er vro a gueret, Ho an Itron Varia Kerdevot
E durant ma pado ar bet. Pa ousomp era ar gonse- canç	A ficour an dut affiget. Ar Chapel-mâ a so ur plaç
Hac ar vertu an Induljanç, Ret eo deomp ober hor po- sibl	Un tenfor precius leun a graç.
Da zont a vir galon d'o gon- nit,	Ur Plaç a venediction, A joa hac a consolation.
En em lequeomp oll a vir galon	Gant a dut a so decedet, Hac o c'horf en douar en- terret,
Azidan ar brotection An Itron Varia Kerdevot	Ma vent bremâ ebars er bet A yaffe d'ar pardon da Kerdevot.
A rai graç domp d'o gonit.	

Nombr bras all a Viraclou a allen recita
Pere a so grêt bemde er Chapel Santel-mâ,
Deut eta oll, Christenien, gant ur ga on parfet
D'ar Pardon da Kerdevot, hac e viot exaucet.
Itron Varia Kerdevot, ny ho supli hac ho ped,
Pedit evidomp JESUS, n'hon abandonit quet;
Ny ho pedo a vir galon tre ma viomp er bet,
Itron Varia Kerdevot, pliget ouzimp sellet. FIN.

Santes Mari, Itron Varia Kerdevot, pedet evidomp
bremen hac en heur eus hor Maro.